

MAGNIFICAT

Magnificat * anima mea Dominum.

Et exultavit spiritus meus * in Deo salutari meo.

Quia respexit humilitatem ancillæ suæ * ecce enim ex hoc beatam me dicent omnes generationes.

Quia fecit mihi magna qui potens est * et sanctum nomen ejus.

Et misericordia ejus a progenie in progenies * timentibus eum.

Fecit potentiam in brachio suo * dispersit superbos mente cordis sui.

Deposuit potentes de sede * et exaltavit humiles.

Esurientes implevit bonis * et divites dimisit inanes.

Suscepit Israël puerum suum * recordatus misericordiæ suæ.

Sicut locutus est ad Patres nostros * Abraham et semini ejus in sæcula.

Gloria Patri.

II

ITRON SANTEZ ANNA

DISKAN

Itron Santez Anna,
Mirit ho Pretoned,
Goulennit dreist pep tra
Ma vemp fidel bepret.

- | | |
|---|--|
| <p>1. Deomp da Santez Anna,
Ia ! deomp oll, Bretoned ;
Eno an nep a ia
Ganthi zo chilaouet.</p> <p>2. Evidomp, o na sked
Ha levenez ive,
Pen deuz hor c'hemeret
Evit he bugale !</p> <p>3. Evidomp-ni a splann
He c'harantez vrasa ;
Etrezomp hi a rann
He burzudou kaera.</p> <p>4. O nag a glanvourien
En em erbet dezhi,
Hag er goasa anken
A gav zikour ganthi !</p> <p>5. Pet guech n'ez-hi rentet,
O madelez dispar,
D'an den dall ar guelec,
Ar c'hleved d'ar re vouar !</p> | <p>6. Petguech var ar mor braz
Da dud o vont da goll,
P'hi fedont, a zigas
Avel mad en eun taol !</p> <p>7. Itron Santez Anna,
Da viken trugarez !
Ni a zeuio gant joa
D'ho kuelec bep bloavez.</p> <p>8. C'houi, tud guen dre an oad,
Na zoujit ket an hent.
Ganthi goulenit mad
Mervel evel ar zent.</p> <p>9. Tud iaouank, ha da-vad
A c'houll karout Doue,
It da c'houlen tmat
Miret glan hoc'h ene.</p> <p>10. Dent c'houi mamou tener,
Evit ho pugale ;
Diouthi kemerit skuer ;
Hi zo bet mam ive.</p> |
|---|--|

11. Guerc'hez, deut d'he zi
Hi n'ho tisprijo ket ;
Mam ar Verc'hez Vari
A gar ar guerc'hez.

12. Ha c'houi, labourerien,
Gant an drevel goasket,
Deut da laret ho poen :
C'honi en deuz dibabet.

13. N'e ket d'an den ouz ker,
Gant dillad-zei guisket,
Nan ! mes d'eul labourer,
En deuz n'em ziskouezet.

III

Santez Anna, o Mam garet

DISKAN

Santez Anna, o mam garet
Ha Patronez ar vretoned,
Goulennit'vit ho pugale
Chom fidel da lezen Doue.

1. Santez Anna n'ankoueo ket
Ez omp he bugale karet,
Penez opad-hon oll buez
Hi servijimp gan karantez.

2. Pegement a dud ankeniet
Zo ganthi bemdez konforted ?
N'euz ket den'evit niveri
Ar ré glanv guelleet ganthi.

3. Ar ré dall a gav ar gueleed
Hag ar ré vouar ar c'hleved,
Teod ar re vud drugareka
Gant levenez Santez Anna.

4. Ar pec'her paour digalonet
En he chapel en deuz pedet ;
Gouelet en deuz he fall vue
Ha kavet karantez Doue.

5. E peb ezom, pa hi c'haver
Ken mad ato en hor c'hever,
Da Rouanez a Vreiz-Izel
Dalc'homp oll da veza fidel.

6. E bro Arvor a bell amzer
E veler meur a chapel gaer,
Mez iliz nevez Keranna
Dreist oll eo an hini gaera.

7. Redek a rer eoz tro-var-dro
D'ar pardouniou a zo er vro,
Mez e chapel mam ar Verc'hez
E ve pelerined bemdez.

8. He limaj hag hani Mari
Zo en dro d'ar groaz e pep-ti,
Ha diraz-ho noz ha mintin
En em daoler var an daolin.

9. Ar c'hroadurick en he gavel
Ve goestlet d'an Itron Zantel
Ha kentiz hag e hell kerzat
Ve kazet d'hi zrugarekat.

10. Var ar mor ha var an douar
E pep danger, e pep glac'har
Ne gaver ket eur guir vreizad
O chom eb pedi he vam vad.

IV

Santez Anna, Mam a garantez

Santez Anna, mam a garantez,
Taolit warnomp eur zell a dreez !

- | | |
|--|--|
| <p>1. Kanomp a vouez huel
Mam goz hon Doue ;
Ni oll, e Breiz-Izel,
Zoh e bugale.</p> <p>2. Itron Santez Anna,
Klevit hor peden ;
Ni a zeu da gana
Ama'neur vanden.</p> <p>3. Ama da zaoulina
Ebarz ho chapel,
Itron Santez Anna,
Ni 'zo deut a bell.</p> <p>4. Santez Anna vened,
Bennoz d'hoc'h hano !
O va mam benniguet,
Diouallit hor bro.</p> <p>5. Soudardet Breiz-Izel
Ken stard en emgan,
A c'houlen ho skoazel
Pa vent kreiz an tan.</p> <p>6. Martolod've klevet
Pa dreez ar mor doun ;
« Santez Anna Vened,
« Pedit evidoun ! »</p> | <p>7. Pleget var an dachen,
Labourer douar,
Evel pep guir gristen,
Bepred a lavar :</p> <p>8. O klask eun tam bara
E harz toul an or,
Kan, paour Santez Anna
Te gavo digor.</p> <p>9. Dirak Santez Anna.
Paour a pinvidik,
It 'ta da zaoulina.
C'houi tud reuzeudik.</p> <p>10. D'au dall ro ar guelede,
Nerz d'an digalon,
D'ar bouzar ar c'hleved,
Peoc'h d'an anaon.</p> <p>11. Kaout a ra ar ar pec'her
Distro da Zoue,
Ha dirag he varner
Truez d'he ene.</p> <p>12. It, tad, mam ha bugel,
It, tud an Arvot,
Divrec'h ho mam zantel
Deoc'h oll zo digor.</p> |
|--|--|
13. Va mam ! en hor bro geiz,
Guechal bro ar zent,
Renevezit ar feiz
Evel ma voa kent.

V

Kristenien da viken

DISKAN

D'hor Mamm Santez Anna,
D'an Itron Varia,
D'hor Zalver benniguet
Ni vo fidel bepred !

- | | |
|---|---|
| <p>1. Hor c'baloun baour mantret
Gant glac'har hag enkreze,
Ni a zo daoulinet,
Diraz-hoc'h-c'houi, Guerc'hez.</p> | <p>2. Kurun hag avel foll
Var-n-omp so dirollet
Hor bro'zo vont da goll
Truez ! Mamm benniguet.</p> |
|---|---|

3. Lezen Doue, guechall,
A rene kaer ar vro ;
Hirio lezen tud fall
He stlej eñ d'ar maro,
4. Vel eur vanden chas mud,
Gant kounar, noz ha deiz
Emaint e-touez an dud
O klask mouga ar Feiz.
5. Ni zo guir gristenien,
Krouadurien Doue,
Savet enn he lezen
Enn he zoujanz ive.
6. Ni a zo kristenien
Prenet gant goad Jezus,
Maget dre c'hourc'hemen
Gant he gorf presius.
7. Kristenien, hor baniel
A zo kroaz hor Zalver
Ni er zao zoun'n huel,
Bemdez, e peb amzer.
8. Eur brezel kriz meurbed
Zo graet d'hor bugale,
Ah ! n'ho dilezit ket,
C'houi zo ho mamm ive.
9. Ar falla kentefiou
Zo roet d'ezho bepred
Koll e raint ho eneou
E skol an Drouk-Speret.
10. Sempl, dinerz, ker bihan
Ma na vert diaoullet
Abred hep kals a boan
Da goll e vent kaset.
11. Petra dalv guiziegez
Mar koliomp hon me ?
Ar skiant, ar furnez
A deu d'eomp euz an ne !
12. Guechall hon tadou koz,
Brudet 'vit ho furnez
A glaske 'r Baradoz
Araok pep guiziegez.
13. Skianchou 'zo netra
Pa 'z deont enep Doue
Ni fell d'omp dreist pep t.a
Savetei hon ene.
14. Guerc'hez, hor Mamm zantel
Roit sikour hep dale ;
E plegou ho mantel
Kuzit hor bugale.
15. C'houi a zo gallouduz,
Var galoun hor Zalver,
Bezit madelezuz
C'houi zo eur vamm dener.
16. E pevar c'horn ar vro,
Neuze, ni holl, Guerc'hez,
Beteg heur hor maro
Ni a gano bemdez !

VI

AVE, MARIS STELLA

Ave, Maris stella
Dei Mater alma
Atque semper virgo,
Felix cœli porta.

Sumens illud Ave
Gabrielis ore,
Funda nos in pace,
Mutans Evæ nomen.

Solve vincla reis,
Profer lumen cæcis,
Mala nostra pelle,
Bona cuncta posce.

Monstra te esse matrem ;
Sumat per te preces,

Qui pro nobis natus,
Tulit esse tuus.

Virgo singularis,
Inter omnes mitis,
Nos culpis solutos,
Mites fac et castos.

Vitam præsta puram,
Iter para tutum,
Ut videntes Jesum
Semper collemur.

Sit laus Deo Patri,
Summo Christo decus,
Spiritui sancto,
Tribus honor unus. Amen.